




# LOUARNIG

miz gwengolo - Niv. 4



Abraham Lincoln



Ar gontadenn



Ar wallabied



# Ar wallabied

**E Tasmania ar C'hreisteiz, e su Aostralia, e vev ar wallabied. Ar re-mañ zo div wech bihanoc'h eget o c'hendirvi aostralian ar c'hangouroued. Tennañ a reont an eil re d'ar re all ha bevañ a reont er memes doare.**

Divskouarn bras o deus ar wallabied, daoust dezho klevet fall. Div wech bihanoc'h eo o favioù a-raok eget o favioù a-dreñv. Nerzhus-tre eo ar re-mañ. Talvezout a reont dezho evit ober lammoù bras. O lost bras ha nerzhus a dalvez dezho da azezenn pa fell dezho mont en o c'hoazez hag a sikour anezho da zerc'hel o c'hempouez pa vezont o redek. Evel ar c'hangouroued e tebront geotenoù ha delioù brouskoad.

Godelleged a vez graet eus ar wallabied hag ar c'hangouroued dre ma ya o re vihan da chom e chakod o mamm evit debriñ ha kreskiñ.

Div wech e vez ganet ar wallabied bihan !



# kendirvi pell d'ar c'hangouroued

D'e c'hanidigezh kentañ eo ken bihan ur c'holen wallabi evel ur c'hreunenn fav ha ne bouez nemet ur gramm. Pignat a ra neuze e-touez blev kof e vamm evit tizhout ar chakod zo ganti war he c'hof, enni peder bronn.

Eno e tap krog en ur vronn hag e ten e vamm hep fiñval e-pad c'hwec'h miz. N'eo ken goude c'hwec'h miz e vo ganet evit an eil gwech. Dont a ra ar c'holen er-maez eus godell e vamm. Evit lammat en-dro e-barzh, ar penn en a-raok !

A familhoù bihan e vev ar wallabied, enno un nebeud parezed dindan beli ur par. Ar feur tev zo gant ar wallabied war o c'hein a dalvez dezho da c'houzañv goañvezhioù yen-tre Tasmania. Ar pared a bouez betek 18 kilo evit ur metrad ment. Betek 12 vloaz e c'hall bevañ ur wallabi well-wazh.

